

Chanson neve. ar Baleur nôs

(101)

Var ton:

Va speret zo jenet, n'oun get petra zo coz,
 N'allan pelloc'h cousget na qennebeut repoz;
 N'allan tenna profit eus a neb nouritur,
 En bil en enfi] chanjont gant an displijadur.

Gret emeus va fossible haq ive consultet
 Coulz en qer, vel var ar mierz cala a vedesinet,
 Ma leveront a eur vouez penoz ezeo Cupidon
 En deus plantet biriou nag ebarz em c'halon.

Goude clevet o rapport me ameus comprenet
 Pell eman ar sourzen demeus va oll c'hlenvet;
 Rac-se me ya e bete da c'hout a me am beo,
 Eur soulajamant benac nag en qever lato.

(lire : am bo)

Bonjour dec'h, Satannie, gouir objet va speret,
 Penos ra o calon, ha c'houi zo yac'h bepret?
 Ya sur, va Yvonic, nemeus get a glenvet,
 Nemet n'am boa jenamant, pa na deuaic'h d'am quelet.

(102)

Casset em boa messajer da c'hout eus o qelou,
 P'ini en deus laqet da redec va daerou,
 O tonet d'am assuri e voac'h aboe tri de
 Gant chagrin ha gant clevet dalc'het var o quele.

Gementse zo derten, tri den zo tremenet
 Aboe m'am boa y avantach, Satannie, d'o coelet,
 O terc'hel d'o cherissa bary entre va diouvrac'h,
 Mes aboe m'o quitaic emeus jenamant vras.

(lire : dez, au lieu
de : den.)

Tud eus oc'h anaoudeg!ez o deus din assuret

Penos o poa santimant da vea va zromplet :
 Neuz e memeus approuvet proverb ar Bug'el fur :
 « Carout en berra caret a zo displejadur . »

(103) Gent ma rafen gement-se, ò va douziq Yvon,
 C'houi velle ar pesget o tont eus ar mor don,
 Erit choaz ho demeurans ebarz en beg ar goe,
 Me o car haq o caro bete fin va bue .

O ! soursen a furnez, c'houi c'heuz va c'honsolet.
 Dre o comzou admirabl pere oc'h eus pronoset ;
 Breman me a vel patant ez eo c'houi a zispoz,
 Eus va buez ha yec'het, coulz en deiz vel en noz .

Cessit, cloarec yaouanq, ò, cessit da barlant,
 Gonet oc'h eus va c'halon ha va rentet contant :
 Ma tremenomp omp buez an eil gant eg'ile,
 Bete ma romp galvet da balez an cele .

====

L'yrêt gant Yvon Feutren ha Guillou Homo,
 scolarien en rhetorig, e scolach st. Brieç, eyeur eva
 boutaillat en vrez hep pen, var marc'hat an ed .

(Vol. II, p. 101-103.)